



CANTIC SPIRITUEL

VOAR BUEZ HA MARO

AN TAD JULIAN MANER,

RELIGIUS A MISSIONER A GOMPAGNUNEZ JESUS,

MARO E PLEVIN, AN 28 A VIS GUENVER 1683.

Allas ! allas ! Bretonet, maro e an Tad Maner,
Maro eo ho sclerigen, maro eo ho tad ker,
Maro eo tost Kerhaëz, e bresbyter Plevin,
Evel m'en devoa lavaret *e creïz douar Corentin.*

D'an ilis colech Kimper e galon so casset,
En ilis parez Pluin e gorf so interret:
En e yec'het en devoa alies lavaret:
« Elec'h ma coëzo ar vezen a renk beza lezet. »

Pa zeuge, dre ar maro, Jesus-Christ d'e c'hervel
Gant ar bopl paour en devoa desiret mervel.
« Gante m'eus tremenet, emezan, va buhez,
« Ganto, goude va maro, chom a garën ivez. »

Tavet eta, bobl a Vreiz, n'en em affliget ket,
Oc'h peden an tad Maner en deus Doue clevet.
En ho creïz ezeo chomet, evid ho soulagi,
En ho corf hac en o ene, dre Jesus a Mari.

Commancet mad en deveus, an eil hac eguille:
A ben nemeur e lenfot scrivet en e vuhe
Da bet den clan en deveus e pep canton gweleet,
Dreïst ar re-all, e Plevin, d'ar re a ya d'e velet.

Commisserien an Escop a allo lavaret
Ped græc e boan vugale en deveus delivret,
Da piou en deus ar c'herzet, ar c'hleo, ar guel rentet,
Hac an traou-all a raï c'hoas, hac en deus dija gret.

Guinidié oa a St. Georg , en escopty Roazon ,
Peder leo diouz Fougera , peder leo dious Pontorson ,
Hoguen choaset gant Doue , an apostol fidel
Evit desqui hent an eê d'an oll Breiz-Izel.

Ne oa nemet trizec bloas , o commanç e studi ,
Pa lavaras Dom Mikel Nobletz dre professi :
« Maga rer din ur peskic , en escopti Roason
« A zui en dro d'ar vro Vreiz da ober mission. »

Pa regente ar bempet , er c'holech a Kemper ,
E teuas Mikel Nobletz da velet e mab quer ,
Hac e comzas eus Andre hac eus e vreur Simon ,
Pa o galvas hor Salver da ober mission.

E tistro e lavaras da Zouarnenezis :
« Gant graç Doue c'houi velo c'hoas mission e Breiz.
« Choazet em eus an hini , dre ordrenanç Doue ,
« A dle ober mission er vro-mâ ma goudé. »

Ne lavaras ket dezan neuze c'hoas Dom Mikel
E voa choaset gant Doue da instrui Breiz-Izel ;
Mæs Doue a zisclerlas dezan e volonte
Pa ze un deiz d'ar chapel hauvet ty mam Doue.

Etre croas ar gardien ha maner Kermorvan ,
E roas eur sclerigen dezan ar Speret glan ,
Dre pehini e velas a Vreiz ar c'hantonniou
Da pere oa destinet da glasq an eneu.

Pa antreas e chapel ar Verç'hes hon Itron ,
En em offras oll dezi a gorf hac a galon :
« Prest a pront oun , emezan , da zicour va Salver
« Da zistrei ar bec'herien so coustet dezan quer. »

Ho pet sonch , Guerc'hes santel , eus ho missioner :
En ho ty d'ar mission n'em ro an tad Maner ;
En ho ty eo commancet , gueneoc'h e poursuiyo ,
En ho ty , gant graç Doue , un deiz e finisso.

Ebars er ker Bourges pa oa abandonet
En eur c'hlevet diremet gant ar medicinet ,
Deiz Nedelec , kent receo sacramant an auter ,
En em voelas evelhen e presanç e Crouër :

« Jesus , Mari , Sant Eozen , ac Ælet Breiz-Isel ,
« Mar rent Doue din yec'het , me yel betec mervel
« D'a ober mission e mesk ar Bretonet ,
« Me er promet , a dra sur , gant eur galon parfæt. »

Doue a comzas ountá en eur sacramanti ,
Hac a lavaras dezan : « Pare viot ep si ,
« Me a gountanto ivez desir bras ho galon ,
« Me ho casso e Breiz da ober mission. »

En amzer ze an nosvez , dre e gousk e songe
E tougue var e kein eur paysant a Guerne ,
Evel Sant Francez Xavier a songe e tougue
Un Indien , quent mont e mission dar vro-se

Courachit, Kernevis, un deiz d'ar Barados
An tad Maner ho tougo evit biken repos ,
Ha cals a Roason , Guenet , Sant-Briec , Leon a Dol ,
Hac a Dreguer a viro ne d'aïnt ket da goll.

Me a gleo Sant-Corentin dija ous ho guervel ,
Tad Maner , ha tad Bernard ho compagnon fidel :
« Deut var ma lec'h , e mesan , m'ho crai pesketerien
« A gals a bec'hereset , a gals a bec'herien.

« M'o guell o daou o nigeal , dreist ar mor perillus ;
« Da besketa ez eont eneou da Jesus. »
Bezint dija e Braet , Sizun hac Enez bras ,
E Molenes , hac Eussa , Enez , Tudy ha Baz.

Un troad o deus voar ar mor , un all voar an douar ,
A gamezou braz ezont , en noz evel al loar ,
Hac en de evel au heol , a dre o sclerigen
E chasseont eus ar Vreiz ar goall devaligen.

Eus an tad Maner ez ar brut e peb canton ,
E peb lec'h er goulenner da ober mission.
An esquibien er goulen , personet , beleyen ,
Autronez , itronezet , tud Ploue , bourc'hizien.

Piou a ouffe lavaret e pet plaç ez eo bet ,
Ha pet pec'her e peb plaç e deveus distroët ?
Essoc'h eo conta ar stereden , pa ve sclæra an noz ,
Evit ar re en deveus casset d'ar barados.

C'hui ér goar , o va Zalver ! c'hui ho c'heuz e contet ,
Ped den , dre ar sermoniou , en devez saveteet ,
Pe dre confession , ar bec'herien mezet ,
Pe dre ar procession , ar bec'herien calet.

Lamet eo an ignoranç dre e gatec'hismou ,
Ar c'homzou vil a lubric , drec'h c'han e c'hanticou ;
Gret en deus ober bemdez d'ar Vere'hes oræson ,
Disquet en devez pidi Jesus-Christ er galon.

« C'hui eo , beleyen santel , c'hui eo missionnerien ,
« Ar fourdelizen caëra emeus e gurunen ;
« Da Zoue , dre e zouçder , dre e brudanç parfet ,
« Dre e oræson fidel en deus o gounezet. »

Dreizoc'h eur bobl infinit en devez saveteet
Hac a raï , gant graç Doue , ac'han d'a fin ar bed :
Houma oa e joa vrassa pa edo e yec'het
Hac ar soulach a glaske en diveza clevet.

N'hon euz quet collet hon tad , n'en em afflijeomp ket ;
Mar domp separet a gorf , n'en domp quet a speret.
Lezet en deus quent mervel , gueneomp oll e galon ,
Evit rei deomp oll dreizan e venediction.

Donet a ra d'hor zouten , pa zeomp d'ar c'hombat ,
Goulen a ra evidomp graçou digant hon tat ;
Disquennet eo aliës eus an eë da zicour
Ar bec'herien tretalet gant an drouc adversour. FIN.

PEDEN EVIT ANEVEZI PROMESSAOU AR VADEZIAN ,
Composet gant an Tad MANER.

Me a renonç d'an drouk speret ,
D'ar c'hic , a d'ar bed milliguet :
E servich an Drindet santel
E fell din beva ha mervel.

Déposé :

V. G.